



Skeudenn : Erwan Le Seure Bihan

TESTENN 2/5

Lennet get **Pascal Tabuteau**

Da selaou àr
www.tidouaralre.com

Hemañ a oa un den kozh hag a yae da besketa e-unan, e-barzh ur skalf er Gulf-Stream. Pevar devezh ha pevar-ugent en doa tremenet dija, hep tapout tamm pesk ebet. A-hed an daou-ugent devezh kentañ e oa bet ur paotr bihan gantañ. Met, goude keid-all a amzer hep bezañ paket ur penn hini, e oa bet lavaret d'ar paotr gant e dud e oa an den kozh-se erru *salao* da vat, a-benn ar fin - pezh a zo an doare divalavañ da lavarout “gwallchañsus” - ha kemennet o doa e dud dezhañ ivez mont gant ur vag all hag en doa tapet tri mell pesk e-korf ar sizhunvezh kentañ. Trist e oa ar paotr bihan pa wele an den kozh o tistreiñ bemdez, goulo e skaf, ha diskenn a rae da reiñ an dorn dezhañ da zougen pe e linennoù punet, pe c'hoazh ar bidev hag ar vazh-krog hag ar gouel farleet en-dro d'ar wern. Takonet e oa ar ouel gant seier bleud, ha pa veze farleet e tenne d'ur banniel soudarded faezh-difaezh. An den kozh, treut ha distronk, a oa roufennoù don en tu a-dreñv de c'houzoug. E zivjod a oa warno burbuennoù du, ur seurt krign-bev dinoaz eus ar c'hroc'hen, a zeu diwar adsked an heol war vor an Trovanoù. Ar burbuennoù-se a yae war-draoñ a bep tu de zremm ; goloet e oa e zaouarn a gleizennoù sanket don, deut dre forzh dornata funioù gant pesked pounner stag outo. Met hini ebet eus ar c'hleizennoù-se ne oa nevez. Ken kozh e oant ha krinerezhenoù en ur gouelec'h hep pesked.

Tennet ag ar gelaouenn Skrid (niv.10), 1977